

# COLLOCOU

## FAMILIER

ETRE UN DEN CURIUS

HAC UN DEN EXPERT,

VAR an abusou commun da bep  
Stadou a veler a rer etoues a bep  
seurt tud e Breiz-Isel, hac el  
leac'h-all.


*Dediet d'ar Vretonet, gant ur mignon  
dezo, hep intantion da choqui den  
e particulier.*

CORRIGET A NEVEZ.



E MONTROULÈS,

E ty A. LÉDAN, Impr. ha Libr.



*Obsequium amicos, veritas odium parit.*

Cals a glevo an dra-màn o devezo regret ,

Balamour d'ar virionez so ennàn discleriet :

An den clàn e zaoulagat n'ell quet sellet an de ,

N'ac ar re a ve coupabl clêvet ar virione.



# COLLOCOU FAMILIER

ETRE UN DEN CURIUS

HAC UN DEN EXPERT,

Var an abusou commun da bep Stadou  
a veler a rere toues a bep seurt tud,  
e Breis-Isel hac el leac'h-all.

*Dediet d'ar Vretonet, gant ur mignon  
dezo, hep intantion da choqui den  
e particulier.*

Var un ton nevez, en eur repeti ato  
an eil vers.

**B**Onjour den coz ha venerabl,  
C'hui a glêvan a so capabl  
D'am instrui ha d'am c'helen  
Var ar pez ameus da c'houlen  
Eur c'hommis oun, hac emeus urs  
Da verqua tout quement disurs,  
Quement abus ha goal gustum  
En deus an dud a rum da rum.  
Den yaouanc oun o tont er bet,  
Gout ar c'hustamou ne ranquet;

C'hui a enev a bep seurt tud,  
Quercouls re vras ha re vunut :  
Hentet oc'h ens a bep seurt stat  
Tud a ilis, tud-gentil vat,  
Tud a justiç ha bourc'hisien,  
Tud a studi, marc'hadourien,  
Artisanet, tud a vicher,  
Mæstr ha mæstres ha servicher,  
Cals a dud coz ha re yaouanc,  
Quen digentil, quen paysan ;  
Livirit din o c'hustum oll  
Evit m'o merquin var va roll,  
Ma vezo great ur reglamant  
Eus an oll generalamant.

*An Den expert.*

Tout e caffet habec enno,  
Hac int tud fur var o meno.

*An Den curius.*

Pe seurt habec, den ancien,  
A guef an dud er veleyen ?

*An Den expert.*

Ar veleyen a suposer  
En em acquit eus o dever ;  
Pe int a ra, pe n'e r'ont quet,  
Coms voar o stad so difennet :  
Occupet int oll deis ha nos

O caç an dud d'ar barados;  
Mæs tud sot int, mar boe jamæs,  
Caç re all d'y, ha chom er mæs.

*An Den curius.*

Livirit-hu din, va den mat,  
Hac abec so en ur prelat?

*An Den expert.*

Eus a escop nac a brelat  
Ne oun netra nēmet pep mat;  
Ar brincet int eus an Ilis;  
A so venerabl e pep guis :  
O doctrin hac o santelez  
O rent henvel ous an elez,  
Ha cousgoude ne ellont quet  
Miret na vent drouc-preseguet,  
Ar veleyen p'o c'houriger  
Hac ar gloër p'o refuser,  
Ne leveront nemeur a vat  
Eus o escop hac o frelat.

*An Den curius.*

Nac ur person hac en a ell  
Plijout d'an dud eguis ma fell?

*An Den expert.*

Eur person mat hervez an dud  
Eo an hini en deus ar brud  
Da veza libr gant e arc'hant,

Hep goulen digant paysant ;  
Mar car ober ber an ofiç,  
Sortial abret eus an ilis,  
Rei da efa ha da zibri  
Da guement den a ya d'e dy,  
Lesel cabestr gant an dud fall,  
Hep o gourdrous nac o zamall,  
Rei liberte da yaouanquis  
Da ebatal en o divis :  
Chetu eno ar bersonet  
A blich muia d'ar vretonet.  
Mæs mar o deus eur guir person,  
Hac a fell deza gant ræson  
Regli e dud, hac oblija  
An dud fall d'en em gorija,  
Hac o les pell hep absolven  
Dessot na reont pinigen,  
Birviquen ennes ne gueront :  
Drouc ar person a leveront.  
Dibaot hini en andure ,  
Guell eo ganto caout ar c'hure.

*An Den curius.*

Mæs ur person hac én a dle  
Fiziout e garg en e gure ?

*An Den expert.*

Pe én a dle, pe na dle quet,

Fiziet vez enna an denvet;  
Pa vez afer, da bep mare  
Cure bepret a renq bale.  
Personet so ne fizient qet  
Alc'huez o c'haos en o c'hureet,  
Hac a fis eno gouscoude  
Alc'huez ar sacr a vil ene.

*An Den curius.*

Livirit din, den ancien,  
Petra servich d'ar veleyen  
Mont da sarmon er c'hadoriou,  
Pa na rer van eus o c'homzou?

*An Den expert.*

Rar eo guelet eur sarmoner  
O convertissa eur pec'her;  
Rac nac an eil nac eguile  
Ne visont qet da guementse.  
Martese ar predicator  
Na glasq netra nemet enor,  
Nac ar pec'her eus e gostez  
Ne entent quet chench a vuez;  
Scouarn vousar ha vanite  
A goll an eil hac eguile.

*An Den curius.*

Me garre caout eur e'honfessor,  
Hac am zrete eus va humor;

Hac ec'h allen fiziout enna  
Pa zaen da goves daveta.

*An Den expert.*

N'en deus cas dit pe da biou  
Mont da gonta da lasiou,  
Rac n'en deus confessor er bet  
D'e benitant n'a d'eo secret.

*An Den curius,*

Secret int oll, cridi a ràn,  
Mæs re rust int, var a glevàn,  
Rac rei a reont goual binigen,  
Pe refus crenn an absolven.

*An Den expert.*

Couls eo guenén e leverfez  
Ne fel qnet dit mont da goves,  
Nemet da lesel a raet  
Da retorn arre d'ar pec'het,  
Ma casses un den ignorant  
Ec'h absolve hep chenchamant,  
Hac a roe dit eur binigen  
A ve soublic dioc'h da c'houlouen,  
Hennez ha te en em grae,  
Hac oc'h taol guenet e zae;  
Mæs goude lein oc'h da espern,  
E coannies gantàn en Ifern.



*An Den curius.*

Aoun bras ameus, den ancien,  
Na choquit re ar veleyen :  
Espernit-y, en han-Doue,  
Ha compsit-din eus ar roue.

*An Den expert.*

Dibaot roue so er bed-màn,  
Na guef ar bopl abec ennàn,  
Dre ma renquont oll fournissa  
Arc'hant ha tud d'e servicha ;  
Mæs en anet e vurmuront  
Hac hep ræson en em glêmont ;  
Corf ha madou omp d'ar roue,  
Pa hor goulen hervez Doue.

*An Den curius.*

Gant aoun na gouste ho puhez,  
Espernit mat ar rouanez.  
Livirit din ha difficil  
Eo pligeout da un digentil ?

*An Den expert.*

An dud-gentil a respeteur,  
Mæs o c'haret ne rear nemeur,  
Abalamour cals anezo  
So difficil pligeout dezo :  
Dilicat int, prest e fachont,  
Dibaot a zen a excusont ;

Ha mar manquer a netra tout  
D'o servicha hervez o gout,  
Pelloc'h goude n'eo quet facil  
Pligeout nemeur da zigentil.  
Me oar erfat hervez ar bet  
Enori noblanç a so dleet,  
Mæs me false din o c'helen  
Da soufr enor hep e c'houlen,  
Hac o deffe humilite  
Assambles gant o c'halite.

*An Den curius.*

N'oc'h quet capabl, ha c'hui habit,  
Da rei quentel da zigentil;  
List an noblanç en o divis,  
Ha comsit din eus ar justic :  
Livirit din hac ur barner  
A ell mancqout en e zever?

*An Den expert.*

Beza barner so dangerous  
Da nep na d'eo quet vertuzus :  
Eur barner mat, leal ha just,  
Na dle beza na drouc na rust :  
Dioc'h ar justic e renq jugi,  
Ha rei e guir da bep hini.  
Barnerien so hac a ro prest  
Setançou treus dre interest,

Aon rac tud nobl ha puissant,  
 Carantez re oc'h an arc'hant,  
 Coffadou guin ha cheriou mat,  
 En tiez bras beza deut mat,  
 Presantchou great pe brometet,  
 Pe c'hoant da blijout d'ar merc'het;  
 An traou-ze tout a so caos  
 Ma ze serret ar barados  
 Oc'h cals demeus a varnerien,  
 Dre ma reont gaou oc'h ar beorien.

*An Den curius.*

Ha ne ell quet an avocat,  
 Pe proculer o pledi mat,  
 Contesti oc'h ar varnerien,  
 Ha difen mat caos ar beorien?

*An Den expert.*

Avocadet, proculerien,  
 Ne fis quet enno birviquen;  
 Dibaot avocat so er vro,  
 Ho c'honsultet nep a garo,  
 Na assurint da bep-hini  
 E c'houneso o procesi.  
 Ar proculer eus e gostez  
 A bromet e lacai evez;  
 Ha d'e gliant e lavaro:  
 Sur ar proces, m'er gounezo.

Evelse ne vanquint james  
 Da boulsa Yan en e broces ;  
 Rac a-unan ez int o daou  
 Evit e zestum en e graou.  
 An eil d'eguile a lavar :  
 Moyen en eus quement a gar,  
 Evit asten ar parchimin,  
 Ha digaç an ed d'ar vilin :  
 Leve en eus, guerzet vezo,  
 Ha mar queromp lod hor bezo ;  
 C'hui avocat, roit esperanç,  
 Me proculer a raï avanç,  
 Hac ar barner a zeporto  
 Da rei setanç quen a garo.  
 Dalc'het vezo Yan en proces,  
 Hep e lesel da zont er mes,  
 Harzet vezo ha destumet  
 Evel lapous en ur gaouet,  
 Ha birviquen er mes ne da  
 Endra choumo pluen ounta ;  
 Dont da raï hep gallout nigeal,  
 Debret vezo ar pez a dal ;  
 Eat an danvez, eat al leve,  
 Losquet vezo Yan da vale,  
 Rac hep arc'hant pe esperanç  
 Ne fell da zen ober avanç,

Un den a les a so ur sant

Mar gra ur pas hep c'huez arc'hant.

*An Den curius.*

Nac ur gressier gant e siell,

Hac en a gustum ober guell?

*An Den expert.*

Siel lequeat gant ur gressier

A gustum atō coustout quer,

Mar d'eo requis caout tri devez

Da ober prisach a un danves,

Dibaot gressier, mar deus nicun,

Eus a tri dez na ra sizun;

Menat paper elcac'h feuillen

A impligeo oll pen-da ben,

Evit caout dioc'h an inventer

Mui evit n'en deus ar minor.

*An Den curius.*

Ha ne dle quet ar c'hurator

Miret oc'h domach e vinor?

*An Den expert.*

Ar c'hurator hac ar gressier

So a-unan e pep asser;

Mar deus madou, en dra badint

Divar gorre e labourint :

Quement camet na pas a rint

Oc'h ar minor tout e contint.

An eil-d'eguile a esô,  
Hac ar minor quez a baeo ;  
Ar c'hurator a yel e quer  
Evit e affer particulier,  
Hac a lacai voar e vemor  
Ez eo eat evit ar minor.  
Deut an amser da renta cont,  
Ar c'hurator so prest ha pront :  
Mui a vezo voar e vemor,  
Evit na voa en invantor ;  
Greffierien ha curatoret  
A ruin cals a vinoret.

*An Den Curius.*

Un den honest ha mignon din  
A c'houl arc'hant e prest ouzin  
Ha c'hui a gred em be affer  
D'e obligea dirac noter?

*An Den expert.*

An noteret pell amser so  
So necesser ebars er vro,  
Abalamour ma zeus tud fall  
Mui evit a so bet gouech-all,  
En amser gos arc'hant prestat  
Var ar guer e vezent rentet ;  
Hoguen breman na elleur fiziout  
N'itra en den anez coll tout ;

Anes caout act dirac noter  
James an dle ne deu d'ar guær,  
Ha c'hoas emeus da lavaret,  
Laca eves oc'h noteret,  
Cals anezo evit arc'hant  
A drompl an dud hac int present.  
Bremâ e scrivont voar ar paper  
Control d'ar pezh a brometer,  
Ha te so facil da drompla  
Pa n'ouzout na len na scrifa;  
Pa n'esse ma vanquont d'o guer,  
Cals anezo ne ve affer  
Nac a noter nac a sergeant  
Da ober dezo paea contant.

*An Den curius.*

Na gomsit quet a sergeantet,  
Rac ar re-ze so tyrantet.

*An Den expert.*

Ar sergeantet a bep amser  
A so douguet e pep carter;  
Dangerus int, ha pa veler  
O recordet en o c'hever,  
E lavarar e ber langach:  
Ar re-mâ ya d'ober domach.  
Mæs petra dal lavaret guer.  
Ret eo o soufr pe e coustint quer.

O c'hanna rear, couls e paoues,  
Rac d'o c'hroc ne vanquont james.  
Nep a so roc oc'h sergeantet  
Sur ma na goll ne c'hone quet,  
Mar caremp oll paea hon dle  
Biquen affer outo n'hor be;  
Nep na ra gaou ous den ebet  
N'en deus quet aoun rac sergeantet.

*An Den curius.*

Evidon-me ne gredan quet  
E ven dleour da zen ebet,  
Na biscoas ne rois diner  
Na da sergeant na da noter;  
Moyen ameus honestamant,  
M'am be yec'het e ven contant,  
Mæs clanvus oun, ha ne oun quet  
Pe ous piou goulen remet.

*An Den expert.*

Mar e c'heus c'hoant da veva pell  
Ha caout yec'het bete mervel,  
Chede amâ petra renques  
Da observi het da vues :  
Eus da vele quent ma sivi,  
Passa, crancha ha c'hues da fri,  
Quemer da sae ha que buhan  
En eur lam cren a dost dan tan.



Evit commanç en em guempen,  
 Goualc'h da visach ha crib da ben,  
 Ha na les e fri netra lous,  
 Nac e taoulagat tam picous;  
 Rinç net da visach ha da zent,  
 Ha netta tout eus a bep hent.  
 Abars e corf ma zaï netra,  
 Gra da zour ha quea da blega;  
 Goude purgi da vouzellou,  
 Guelc'h da zaouarn ha da c'henou;  
 Quemer goude sevel mintin  
 Un tam bara hac ul loum guin :  
 Sorti abret mar be caër,  
 Glao pe avel chom er guër,  
 Pa zistroï goude pourmen,  
 Laca evez oc'h yenien,  
 M'ar d'eo yen ha cris ar gouan,  
 Da gof oc'h taol, da guein d'an tan.  
 E peb amser bes sourcius,  
 Da bourvei bouet yec'hedus,  
 Bevin, hoüad, lue, yar ha maout,  
 A so mat, mar guelles o c'haout;  
 Ar c'hic moc'h-sall assesonet.  
 A lesi gant an aillonet,  
 Rac ar guella tam pa goust quer,  
 A ro degout gant an amser.

Pa ve da gorf boeteet mat  
Gra exerciç ha les ar plat,  
Ha na ra quet, laca evez,  
Daou repas bras en un devez :  
Na zebr james quebel toussec,  
Pesquet gregun nac ar melvet,  
Na morilles na mousseron,  
An traou-se tout so ampoeson,  
Viltançou int eus an douar ;  
A so noasus da nep o c'har ;  
Et da vin pur ha souben tom,  
Ha pep bini diouc'h da ezom.  
Anes caout gout na zebr netra,  
Delc'h apetit bepret un dra,  
Exces dibri, exces efa,  
N'eus quet a gas pe meus a dra,  
A ra da vui a dud mervel  
Evit ne lazer e bresel,  
Na zebr nemeur a vouadeguen,  
Nebeutoc'h c'hoas a silsiguen ;  
Mæs n'eus quet a gas pe da heur  
Heus a fourmach na zebr nemeur,  
Pebr gant guinæc n'en d'eo quet mat  
Da gonservi an estomac,  
Hac ar butun a ra dies  
a guemeret re alies,

Ar pesquet mat da zeiz vigel,  
Ne ranquer quet o dilesel,  
Mæs a nep seurt eus a besquet  
James en deiz na ra daou bret ;  
Ar viou fresq dioc'h an nos  
So yac'hedus abars repos,  
Gant e neuvo ar veleyen  
Ebars er vi var al lezen,  
Pa o c'hifi poaset tano,  
Ef oc'h da ben hep e vano :  
Na zebr netra na ve poaset,  
Rac an traou cris so re galet  
D'hon estomac da zigeri,  
Ha na ranquer quet o dibri,  
Rac-se'ta laca evez pis  
Na zebri re eus a frouez cris,  
Na saladen nemeur a dra,  
Rac dibri cals ne dal netra.  
Pa zibri boet, quemer amser,  
Na zebr tam nemet dre voder,  
Ma allo quent arre dibri  
Da estomac peur digeri,  
Ha mar fell dit caout plijadur  
O tibri bouet hervez natur,  
Ro spac d'an dent etre pep tam,  
Abars cregui a nevez-flam,

Ar-sucr so mat var al leas guen,  
Gant an aval, gant ar beren,  
Gant ar peches, gant ar civi,  
Gant ar framboes pa o c'hivi.  
Eus a raisin na queresen  
Na lonc ar men nac ar c'hroc'hen,  
Nemet sec'het pe naon a pe,  
Na zebr tam na ne ef banne.  
N'en em garg re eus a netta,  
Ispicial eus a vara.  
Quercouls en an hac er gouan  
Na zebr nemeur a dra da coan;  
Eus a souben hac a ragout  
Debr un neubeut, pe lessi tout.  
Goune da lein chom e repos,  
Goude da goan quers bete nos;  
D'ar mintin quea d'ar menesiou,  
D'an abardaez d'an-disheoliou;  
Na guers re-vuen na re c'hourec,  
Quea d'ar pas ha les ar reded  
Bete c'huez ec'h elles bale,  
Nemet da rochet a dreusse,  
Ha na souffr quet var da groc'hen  
Re a domder na yenien,  
Ma cheinch lingeri alies,  
Pe autramant e vezi dies.

Goude mis ebrel, da fin eost,  
Da dan ebet ne di quet tost ;  
Croc er vouteil hac er veren,  
Essoc'h vizi an drederen.

Goude mis eost bete mis mæ,  
Ef ar guin gant nep er pae.

Goude crez-deiz les ar c'housquet  
Deut anter-nos ne veillit quet,  
Rac ne quet yac'hus beilla pell,  
Sevel mintin a so cals guell.

James voar da guein ña gousqui  
Ha nebeutoc'h c'hoas voar da fri :  
Var da gostez chom er guele  
Var an eil tu pe eguile.

Mar e pez c'hoant d'en em voalc'hi  
Ebars en dour en em liqui,  
Gant an dour yen guelc'h da zaouarn,  
Non pas da ben da ziouscouarn.

Mar des er beign, sorti abret,  
Chom pell en dourne renquer quet ;  
Quendalc'h da dreid ha da ben tom  
Ha netra quen ne c'heus ezom.

Ma ro da gof dit nep encres,  
Na zale quet na di voar ves,  
En em rinç tout eus a peb hent,  
Hep miret dour avel na guentl.

Pa vez brumen a het an nos,  
Dalc'h da dy varnot serret clos,  
Ha laqua evez voar an oll  
Oc'han erc'h, heaul meurs, avel foll.  
Var an deiz les ar c'housquet,  
Chom e cador, na c'hourves quet.  
Pa vez tomder e creiz an an,  
Chom en disheaul da heana,  
Nac effort er bet mui na ri,  
Nac o redec nac o c'hoari.  
Les a gostez ar procesou,  
Pep seurt disput ha querellou,  
Beo disourci hac hep chagrin,  
Tristidiguez a so malin,  
Hac a so caos, hervez ar brud,  
Da abregi buez an dud.  
Ha mar fell dit beva eürus,  
Deus da henti an dud joaüs,  
Ha na implic, mar credes din,  
Apotiquer na medecin;  
Rac mar queres en em regli  
Quen en esa, quen en debri,  
Quen en repos, quen en ober,  
A vedecin ne c'heus asser,  
Rac peurvuia an excesiou  
A so caos d'hor c'hlevejou;

Pe te so yac'h, pe te so clàn,  
Laca evez da vianàn  
Penaos an oll vedecinet,  
Ar re vella tout a gaffet,  
Ne reint quiet d'an nep o c'halvo  
Remet ebet oc'h ar maro;  
Rac quement int guitibunan  
E renquont mervel o-unan.  
N'eus medecin ebars er vro  
Peb quelou mat d'an oll na ro,  
Ha na bromet ober pare  
Eus o clenvet pa vez dare;  
Purgi, goada, rei lavamant  
A raïnt d'an oll dioc'h o arc'hant.  
Mæs gout penaos na pe da heur  
Rei remejou, n'ouzont nemeur;  
Tud habil int voar o meno,  
Mæs hasard eò fiziout enno;  
Pe te vevo, pe te varvo,  
O faeamant o devezo :  
Par consequant, mar credes din,  
Na fis biquen e medecin.

*An Den Curius.*

Va bennos deoc'h den ancien,  
C'hui oc'h eus roet din ar voyen  
Da gaout yec'het a la parfin,

Hep caout affer a vedecin :  
Livirit din an abusou  
Ha gommeter en traficou.

*An Den expert.*

Dibaot eo ar varc'hadoures  
Na reat ganti affronteres,  
Pouesiou scan ha goalen ber,  
Musur bihan ha guerza quer,  
Voar digarez rei marc'hat mat,  
Guerza traou fall eleac'h re vat,  
Chede eno pe seurt trafic  
A rent marc'hadour pinvidic ;  
Credit a reont, hac ar bed-oll  
A ya d'o stal evel tud foll.  
Allas ! an termen a zeu prest  
Ma renquer paea an interest,  
Deut an termen da gaout arc'hant,  
Ret eo paea pe caout sergeant,  
Ha sot oc'h o prena netra,  
Ma no c'heus arc'hant da baea ;  
Pe mar ec'heus qea da ur stal vat,  
Ha digor franc da zaoulagat ;  
Pe vi tromplet gant da zen  
En eil façon pe en e ben.

*An Den Curius.*

Pehini ar guella a zaou unan



P'er marc'hadour, p'en artisan?

*An Den expert.*

Arabet ê lavaret gaou,  
Rac d'en em heul e zeont o daou,  
Mar impliges artisanet,  
Laca evez, pe vi goanet;  
Ardou o deus en o micher  
Da drompla mæstr ha servicher :  
Maxim commun da artisan  
Eo prometi da peb-unan  
E rei oll qement a c'houlen,  
Endra vezo croc er veren ;  
Efet ar guin hac eat er meas,  
E vi tromplet na mui na mæs.  
Cals anezo so ignorant  
En o micher pe feneant,  
Evit toucha gant an esqen,  
Planta'n ados gant ar vesqen,  
Squei ha darc'ho a daol da daol  
Pe gant buohal, pe gant morsol,  
Dressi, lemma an hostillou,  
A oar pep Yan ha peb Guillou ;  
Hoguen tailla dioc'h ar musur,  
Ober labour fin hac assur,  
Dibaot hini er goar ober,  
Pe e laëro cals amser.

Artisanet mar greont marc'hat  
A so nos ha deiz o labourat,  
Mæs pa labouront dioc'h an deis,  
Eus a bevar e reont eis.  
Ha mar labouront dioc'h marc'hat,  
Dibaot e reont labour vat;  
Labourat fall ha coll amser  
A gustumont tout da ober.

*An Den curius.*

Un habit ameus da ober  
Hac a renqan caout qemener,  
Voar a livirit ase din,  
Sur avoalc'h tromplet e vezin.

*An Den expert.*

Qemener ha qemeneres  
A zrouc-breseguer alies;  
An dorn a groc o deus ato,  
Ha danger ê fiziout enno.  
Griat gorrec, laëres amser,  
Cas brudou fal a guær da guær,  
Prena traou brao da dud yaouanc,  
Hep gout d'o zat gant e arc'hant;  
Dispen dillat a vez laëret,  
Gant aon na vent anavezet;  
Truffla digant servicherien  
Quic pe amann, bleut pe vrignen;

Tamou etof, cudennou neud  
Da sevel stal bep un neubeut,  
A ra da gals gant an amser,  
Eus a dailler dont da vercer.

*An Den curius.*

Pe c'hriat eta pe vea,  
A guivit-hu an direbecha?

*An Den expert.*

Me gonto deoc'h evit respont  
Pe seurt bues a gunduont :  
Guiaderes so un etat  
A so qempen ha delicat ;  
Bemde c'houlou e vezont brao ,  
Ne renqont souffrnac heaul na glao ;  
O blam a rer o deus an teich  
Da guemeret dies a veich  
Eus an anneven cudennic,  
Hac eus ar fleven ur branqic,  
Evit sevel ul logoden  
Da ober d'e c'hrec saë pe losten.  
Hi a ene erfat e goas,  
A lavar dezâ digaç c'hoas ;  
Evit ar pris ne d'ê qet qer,  
Accord a reont e daou guer,  
Marc'hat mat en deus hac a ro,  
Qement all ar re en devezo ,

Pa stevo un anter guiat,  
E vezo touchet un tam mat  
Da ober couef pe mouchouer,  
Pe autramant colier da gouer ;  
C'hoas e reont meur a veniat  
Dar guemeneres da vriat.  
Goude e zaint da c'houlen cuden  
Da achui ar viaden ;  
Ar marc'hadour en deus caër clem ;  
M'emeus aon enont n'am flem ;  
Mar lavar eo e viat stris,  
E responto al laon so pis,  
Mar za da glem an aneven,  
E lavar e tor an neuden ;  
Pa e musur gant e goalen,  
E c'hef re ver dioc'h an daou ben.  
Ha mar car sellet outi pis,  
E velo enni neudennou bris,  
Souillet, goal great ar bevennou,  
Perzier gollo diffiennou,  
Neudec ha flasq al lian,  
Gant an ascorn frotet bian :  
Mæs petra a dal e damal,  
Couls e gaouet eguis un all :  
Comsou en deus d'en em excus  
Oc'h qement a deui d'e accus :

Arabet eo reded ar brud,  
Ret ê dezan fiziout en dud.

*An Den curius.*

Livirit din, den ancien,  
A c'hui voar doare an hostisien?

*An Den expert.*

Ya, rac alies, siouas din,  
Emeus efet demeus o guin.  
Mar em gredes, na fis james  
Nac en hostis nac en hostises;  
Mont d'an davarn a so ebat  
D'an nep a gar ober cher vad,  
Mæs dont er meas a so dies,  
Nemet contant ve an hostises.  
Pa antrei en un davarn,  
Laca evez d'en em c'houarn;  
Rac mar tremenes ar rouden,  
E pai diou veich da souben;  
An hostises evit commanç,  
A rai dit cant reveranç,  
Mar deus guin mat, lot a pezo  
Qent na vizi santet mezo;  
Goude guin bas ha dour enna  
A vezo roet dit da efa;  
Efet ar guin, debret ar c'hic,  
E vezo contet ric a ric.

Te a gont tri hac hi pevar,  
Pea a ranqi en e lavar,  
Ha grêt e c'hont oll gant Catel,  
Ret eo caout arc'hant pe vantel,  
Un hostis hac un hostises  
Mar efont guin re alies,  
A veler tout abars ar fin  
Oc'h efa dour varlerc'h ar guin.  
Cals anezo evit ar guir  
A ra cher vat hac ebat hir,  
Ma na reont gaou oc'h an nep er pae;  
Mæs dibaot eo an nep er grae,  
Oc'h Per, oc'h Pol e vescontont,  
Hac evelse en em disont;  
Ar gabaret a zoug malheur  
Ha d'an hostis ha d'an efer,  
En em zaoni a ra an hostis,  
Hac an efer a bae ar mis.

*An Den Curius.*

Livirit din, den venerabl,  
Hac ur Breton a ve capabl  
D'en em ganna en un arme  
Evel er guear gant ur banne?

*An Den expert.*

Ar Vretonet a Vreis-lsel  
Ne gueront qet mont d'ar bresel;

Tud vaillant int voar o meno,  
Courach o deus betec eno :  
Ne deus netra o disconsort  
Evel rancout tenna d'ar sort ;  
Pa na c'houlenner nemet unan,  
E cren an oll guitibunan :  
Guel ê guene, eme Breton,  
Beva pell, ha beza poeltron,  
Evit na d'ê mont en danger  
Hac hazardi da goll va fer.  
Mæs tud sot int hac abuset.  
Ha caer o deus en em guset,  
Dont a raï sort qent pe goude  
Ma ranquint mervel cousgoude,  
Ha darn-vuya a zesertont,  
Er galeou en em guefont.

*An Den curius.*

Pe seurt abec a gueffit-hu  
Enep a guemer habit du,  
Hac a bretant mont en Ilis  
Da zouguen chap ha supitis?

*An Den expert.*

Aon bras emeus cals anezo  
Nemet goall fin n'ê deveso ;  
Cass tud d'ar scol a so facil,  
Mæs o gouarn so difficil ;

Evit beza eat d'ar scolach,  
Ne maint qet e pen o beach :  
Tud misus int, dispign a reont ;  
Ha netra tout ne chounezont ;  
Goude ruina mam ha tat,  
Un hazard eo mar gr'ont fin vat ;  
Ar yaouanquis a ra dezo  
En em deboch cals anezo.  
Arc'hant ne vanq qet da gloarec,  
O songeal e vezo bælec ;  
Guisqet brao, cher vad a ra,  
N'en deveus deffot a netra.  
Henti a raï tud libertin  
Hac e gustumo dioc'h ar guin ;  
Mont da efa ha chom oc'h taol  
Epad ema'r re-all er scol.  
Goude repas mont d'a c'hoari,  
Pe da hestall gant merc'h Mari.  
Chede eno custom clouet  
Pa zeu arc'hant digant couer,  
Latin a oar, bælec vezo,  
Mæs netra tout ne dalvezo.  
Ne deus cloarec na scolaer,  
Ma carent toud studia caer,  
Pidi Doue voar o daoulin,  
Ha tec'hel diouc'h tud libertin,



Ne raent fin vat hep dale pell,  
Hac y hac o zud a ve vell;  
Mar be deboch en e studi,  
Emeus a gant ne deu hini  
Ne rai dishenor d'an Ilis,  
O touguen camps a surpitis.

*An Den curius.*

Livirit din ha ne gasset  
Er c'houenchou abeo ebet?

*An Den expert.*

Bues ar menec'h so ur stat  
Admirabl dreist peb etat.  
Ar menec'h gant Doue galvet,  
So tud santel ha tud parfet,  
O buez vat, o santelez  
O rent henvel oc'h an ælez,  
Queit ha ma heuliont o reglen  
Eus a vir galon pen-da-ben;  
Mæs ar reglen en o zouez  
Ne d'ê get ato ar pouez;  
Elec'h chom fast en o tiez,  
O gueler o reded aliez  
Da visita demezellet,  
Tud gentil hac itronezet.  
Pa zint rentet er c'houanchou,  
Ne glever nemet discoursou,

Etre menac'h ha merc'hejou,  
Hed an deiz er parlouerou,  
Ha ne ell den cridi e Doue,  
Sujet an oll discourson-se,  
Tremen a ran cals a draou all  
A reont sioas en ur gualtal;  
Pedomp Doue ma tuint breman  
D'en em regli voar ar pezmàn.

*An Den curius.*

Livirit din ha nep disurs  
A gommerter en drede-urs?  
Me gare gout ha den ebet  
A gaf abec er seurezet?

*An Den expert.*

An drede urs a so ur stad  
Gant an Ilis approuvet mat;  
Mæs cals a dud a so enni  
Hac a abus eus anezi,  
Seurezet so ma zaent e pris,  
Ne dalfent qet o habit gris;  
Ha mar telont netra oc'hpen,  
Ne dalont qet o habit guen;  
O daoulagat a sell isel,  
Hac o c'halon a zoug huel;  
Un dra a dleont en honor  
Nemet o zeaut hac o humor.

Gant habit guen an humilite  
E cuzont o superbite ;  
D'an oll int servichereset,  
P'a n'ellont beza mæstreset,  
Patiant int voar o meno,  
Mæs souffr netra ne fell dezo ;  
Drouc coms a reont a bep unan,  
Nemet anezo - o - unan.  
P'en em guefont en ur bagat,  
Ez eont oll d'en em scandalat,  
Hac aviziou d'en em gribat,  
A daoliou ivin bete'r goat,  
Ne gomsan get presantamant  
Eus a nep so fur ha prudent ;  
Parlant a ran e general ;  
En em graffet nep en deus gal.

*An Den curius.*

Pe mont en urs, pe dimisi,  
Eo ar guella da bep-hini?

*An Den expert.*

Ar c'hustum eo dre interest  
D'an dud yaouanc dimisi prest  
Mæs dimisi prest so tromplus,  
Mont re vuan so dangerus,  
Ha dreist pep tra amourouset  
A ra d'an dud beza tromplet.

Arc'hant, guenet ha lignez vras  
En deveus tromplet meur a voas;  
Promessou great gant goaset  
En deus tromplet cals a blac'het.  
Tud re yaouanc, mar demesont,  
Goas pe vaoues mat ne reont  
Yaouanc gant coz a ve cals goas,  
Laouen hirio ha trist varc'hoas  
Caret guenet ne bad quet pell.  
Caret honestis a so guell.  
Plac'h difæçon, mar be parfet,  
A verit mui beza caret  
Evitar c'hoanta so er vro,  
Mar car tout nep e c'haro :  
Te cousgoude so touellet  
Gant nep en deus mui a c'henet;  
Da vlam a rear, couls e lesel,  
Ha cousgoude ne di qet pell.  
N'en em guet qet re divezat  
En ty forn da c'houlen poasat,  
Caret out ha caret a res,  
Promessa so, a leveres,  
Sotoc'h a se out prometti,  
Ha sotoc'h c'hoas vez dimizi,  
Ma na c'heus clasqet peadra  
Hac hi ha te evit beva;

Rac carantez ne bado get,  
Mar deu ezom goude euret :  
Amourousdet d'an dud yaouanc  
A so caos da vil nec'hamant.

*An Den curius.*

Na mar dint deza demezet,  
Netra oc'h eus-hu da lavaret?

*An Den expert.*

Goas ebet ne dleffe james  
Caout nep disput oc'h e vaoues,  
Na fiziout re ne dle enni,  
Pe e vezo tromplet ganti;  
Rac an ozac'h pa vez fachel,  
Mar lavar guer oc'h e briet,  
A rai dezi mont e coler,  
Hac e respont gant an eil guer.  
Osac'h ebet ne dle james  
Mont d'ar banquet hep e vaoues,  
Pe autramant, hep e voueso,  
Guell cher evinta en deffo.  
Eur vrœc honest, fur, ha parfet,  
Na gar den nemet e friet,  
Pa za ermeas e deus anqen,  
Pa zeu d'ar guær e vez laouen;  
Mæs er c'hontrol eur c'hrec gadal  
A zouc friantis voar e zal,

Pa zeu dirazi e friet,  
So guel ganti n'er guele qet.  
Ozac'h fachet pa zeu d'ar guer,  
Ar vroec ne dle lavaret guer,  
Mar be modest, ha tevel tout,  
E zaï prest coler en e rout.  
Teaut groec so caos, pa e c'hanner,  
Peur-liessa da vil miser.  
Dibaot a zen so demezet,  
Na enou prest gant e briet :  
Daou zeis hepquen en deus pep goas  
Ha pep maoues pligeadur vras,  
Ar c'henta eo deiz an euret,  
Hac an eil eo deiz an decet.  
C'hoant dimisi, c'hoant beva pell  
En Deus pep Yan ha pep Catel ;  
Demeset int, pell e vevont,  
Tout var o c'his e carent dont.

*An Den curius.*

Caret a raent goas ha maoues  
Beza intaon pe intanves?

*An Den expert.*

Beza intaon hac intanves  
A gueffont tout a so dies ;  
Pa vez maro pennadurez,  
Ozac'h pe groec en tieguez,

Neuse intaon pe intanves,  
Qen na vez eat ar c'horf ermes,  
A lavaro da bep-unan :  
Biqen james demezan ;  
Mæs enteret ar c'horf maro,  
Goude prest e dislavaro .  
Pa vezo achu an eizvet,  
E carrent beza demezet ;  
Martese e zint o-unan  
Da barlant oc'h ar vasvalan,  
Mar bez diseves priedou.  
Nep a chom beo gant ar madou,  
A guso lot eus ar moyen  
Da frustra an heritourien,  
Hac er memes tra a rai  
D'e bugale, mar deus hini,  
O custum cuzet madou,  
Neud ha lien a sac'hadou,  
Evit berrat an invantor,  
Hac ober gaou oc'h ar minor ;  
Dimisi a raint hep dale,  
Ha dont a rai c'hoas bugale,  
Ha divar goust ar map qenta ;  
E fell mesur an diveza.

*An Den curius.*

Livirit din, ur servicher

Penaos e vanq en e zever?

*An Den expert.*

Dirac ar mæstr mevel a ya,  
Pa ne guel e chom en e za;  
Mates so fuç dirac mæstres,  
Adren e c'hein e diodes;  
Ar boueta, ar mad, gajou bras  
A gueront oll maoues ha goas,  
Labourat tenn a mont buhan,  
Ne gueront qet muguet an tan.  
Dibaot na mates nac ur mevel  
En un ty mat e chomo pell,  
Na roint oll sujet da zoueti  
Ez eus eno guen dimizi.  
Cher vad a reont, ne goust netra,  
Nac an dibri nac an efa :  
Eas ê cundui amouroustet  
Divar gout mæstr ha mestræset ;  
Mével, mates a gar an danç  
D'an tiez mat a zoug goal chanç  
Mével yaouanc a gar ar guin,  
Nep a fis ennâ n'ê quet fin,  
Mates friant ha dibarfet,  
Hac a sell re oc'h ar goaset,  
A ruino, bep dale pell,  
Quercouls ar mæstr hac ar mevel;



Lipouseres, cher vat atao,  
Ha prena bep bloaz dillat brao;  
Dibri mintin, cousqet abret  
Car ber amzer etre bep pret,  
So maxim mevel ha mates,  
O teport mezur paourentez.

*An Den curius.*

Ar mæstr eta hac ar væstres  
Ha ne fachont-hi james?

*An Den expert.*

Dibaot hini a ell tevel  
Nac oc'h mates nac oc'h mevel,  
Ha cousgoude ne vezont qet  
O re gourdrous guell servichet;  
Natur an oll bihan ha bras,  
E cassât an oll dud egas :  
Mar bez egasset ur mevel,  
Gant ber labour e vezo pel ;  
Mar bez egasset ar vates,  
Eus un heur e rai devez,  
Pe autramant a raint labour fall  
Evit mont da ur servich all.  
En daou gostes e vurmuront,  
Ha netra erfat ne reont,  
Ha beza gourdrouset oc'hpen

A ra da veur a servicherien  
Laëres e vœstr, pe coll amser :  
Nep a ra comananchou caër  
A gustum ato mervel laër :  
Arc'hant, peoc'h ha boeta mat  
A ra d'an oll dud labourat ;  
Ma na reont get oc'h ar pris-se,  
E caout re o liberte,  
O c'hass ermeas hac o faea,  
Hep o gourdrous eo ar guella.

*An Den curius.*

Estonet bras en em gafan  
Gant ur c'hustum so er vro-man :  
Ne deus itron na bourc'hises  
Na guemeront oll magueres  
Evit mesur o bugale,  
Quen na vezont deut da vale ;  
Ha cousgoude n'en deus hini  
N'en deus Doue roet dezi  
Diou vron ha leas evit mezur  
Ha sustenti e c'hrouadur.

*An Den expert.*

Un abus bras eo qemense ;  
Anez ma ve necessite ;  
Ar c'hustum cris ha dinatur

E da vam g' enel crouadur,  
Hac e briva neuse souden  
Eus ar pez en deus d'e souten;  
E vagadurez naturel  
Eo læz e vam da ur buguel,  
Hac injustiç a rear ountã,  
Oc'h e briva eus aneza.  
Mervel a ra cals a vuguel  
E deffaut e læz naturel;  
Ha rac-se e vanq alies  
An itron hac ar vagueres :  
Ar c'henta vanq d'e c'hrouadur,  
O caret re e fligeadur,  
Ar vagueres evit arc'hant  
A abandon un innoçant,  
Hac en les da veza debil  
Evit mezur map digentil.  
Meur a itron ameus guelet  
O mezur chaç, anevalet,  
Hac o leçea var o barlen  
Da zibri lod eus o souben;  
A boc dezo, o briata,  
Hac a ro dezo an tanqenta;  
O c'hy ganto en o guele,  
En dishenor d'o c'halite,  
Ha cousgoude ne vaguent qet

Ur buguel queas o deus ganet.  
Ha ne dint-hy qet dinatur,  
Mezur qy eleac'h crouadur?  
Cals a grimou a rear ouc'hpen  
Abalamour d'ar vagaden,  
Eus a bere ne gomsan qet  
Gant aon ha mez o laret :  
Ne deus maguer na magueres  
Na fasiont re alies.

*An Den curius.*

Livirit din, ur paysant  
Hac én a hel beva contant?

*An Den expert.*

Ur paysant a hel beva,  
Caout da zibri, da efa,  
Hep caout ezom eus a varqis,  
A zigentil nac a voure'his;  
N'en deffe ezom eus a netra,  
Ma talc'he oll qement a ra;  
Mæs destumet e oll hedou,  
Hadet e liors, e barcou,  
Qen alies e goul ounta,  
Ne chom casi netra ganta.  
Ar rouanes gant o zaillou,  
An dud-gentil gant o fermou,

Ar personet gant o deogou,  
Bellec, menec'h gant o guestou,  
Servicherien gant o gajou,  
Medecinet gant remejou,  
Tud a justiç gant procesou,  
Hac ar beorien gant ezomou,  
Mibien caër gant o argoulou,  
Milinerien gant o gobrou,  
Ar sergeantet gant o misou,  
Hac al laëron gant o ardou,  
Oll e pillont ar paysant,  
Ha d'an oll e furnis arc'hant ;  
Ha cousgoude en disprisont,  
Hac hep ræson er goal-drêtont ;  
Rac n'en deus tud voar an douar,  
Ar bed-oll er cred hac er goar,  
En em vir couls oc'h ar pec'het,  
Evel ma ra paysantet.

*An Den curius.*

Darbet eo deomp, den anciën,  
Ancouat ar vilinerien,  
Hac ar bed oll guitibunan  
A renc o c'haout bras ha bian :  
Hac én a so den er c'hanton  
O drouc-presegue gant ræson ?


*An Den expert.*

Milinerien, dreist an oll dud,  
A bep amser o deus goal vrut,  
Ha sujet int d'an teudadou  
Abalamour d'ar sac'hadou.  
O blam a rear n'ellont qet  
En em souten hep laères ed;  
Ferm vras o deus, cher vad a reont  
Gant o madou, n'ouzont ma zeont,  
Re e qemer, eme couer,  
Eleac'h scudel gant ar c'hrouer;  
Ar groagues qes ne gueffont son  
Nac e pot ar jognac nac er forn,  
Hac evelse e eriont caër :  
Eat eo va sac'hat gant al laër.  
Ar miliner a sell a dreus,  
Hac a lavar : va guir a meus;  
Oblivet oc'h, va Jaqeta,  
Da zont d'am milin da vala,  
Ha c'hui hoc'h eus un arves fall  
Da gaç an anter da lec'h-all,  
Hac evelse ec'h allan reis  
Elec'h c'huec'h quemeret eis.  
Ne ra qet erfat ar merer  
Miret e guir oc'h miliner?  
Hac ur miliner a ra gaou


Eleac'h unan qemeret daou?  
 Hac evelse par conseqant,  
 Ez int daou laër ha drouc contant,  
 Ma livirin gouscoude franc  
 D'am avis pehini so vanc,  
 D'ar meiller ur pen e ruin,  
 E beza sujet d'ar vilin,  
 Penaos benac e labouro,  
 Ne vanqo biqen n'ho tromplo :  
 Ma renq furnissa dioc'h ar pouez,  
 E lacaï dour en e zouez,  
 Goude e slapo het-a-het  
 Ar bleut voar an douar so gleb :  
 Beza ez eus milinerien all  
 A vir ed mat ha rai ed fall,  
 Goude e zaint gant o ed mat  
 D'er guerza deoc'h er marc'hat.  
 Pa guemeront diou scudellat  
 Elec'h unan a ur sac'hat  
 E custumont quemesq usien  
 Ganto evit talvout brignen.  
 Peurvuya o deus ar guis  
 Elec'h ar bleut da guemer gris,  
 Evit contanti ar groagues,  
 Quen na vezo eat en tamoues :  
 Petra servich dezo facha,

Cas a raïnt dezo pe paea,  
An nep a renq paea arval,  
A ra daou gobr pe areval,  
Fiziout ennan ar guella dit,  
Hac e ri guell cals da brofit.

FIN.



## AVIS D'AL LENNER.



**C**AOUT a rêr e ti LÉDAN, Impri-  
mer ha Librer, e Montroulez, a bep  
seurt Rimou, Chansoniou, Canticou,  
Guerzou ha leoriou brezonec.

Guerza a ra ive leoriou ofiç ha re  
all, plun, liou, paper da scriva, paper  
guen hac a liou da ober faus-fleur.  
chapeledou, croisiou arc'hant, ima-  
chou, etc.